

AVAL HON LENNEGEZH O C'HWEZHAN (40)

« Gant estlamm hon eus lennet warlene *Gurvan*, pezh-c'hoari Tangi Malmanche. An den-se, divrud, hogos ankounac'haet adal un ugent vloaz bennak, ma embannas *Marvailh an Ene Naoniek* ha ma klaskas sevel, gant un nebeud re all, *Spered ar Vro*, ur gelaouenn-gele'h dellezek a Vreizh, en deus tennet trumm *Gurvan* a-douez paperoù kozh. Ha ken mat ez anavez diegi ha digasted e genvroiz ma n'en deus moullet nemet hanter-kant a skouerennoù. N'int ket bet prenet holl c'hoazh, war a glevan. Ne gomzin ket amañ eus *Gurvan* evel pezh-c'hoari. Ne gomzin ket eus ar mennozh don, - amañ e c'haller komz eus mennozhioù don, - glac'harus ha goapaus war un dro, a sklêrijenn ar pezh penn-da-benn, o reiñ buhez, muioc'h eget ma vefent livet evel tud wirion, hervez giz hor pezhioù-c'hoari all, d'an div verc'hodenn, *Gurvan* hag *Aziliz*. Eus *Gurvan* evel pezh-barzhoniezh e komzin hepken. Kement am eus lavaret diwar-benn *Bleimor* a c'hallfen adlavarout. Setu amañ ivez ul labour, graet 'pell diouzh safar ar bed', hag o tougen merk ijin un den, e breder hag e soñjoù. Setu ivez gwir varzhoniezh, hag ouzhpenn, hini unan a oar ar vicher. Barzhoniezh uhel, barzhoniezh eeun, an hini n'he deus ket ezhomm eus gerioù rouez ha troioù-lavar digustum ; glanoc'h eget barzhoniezh *Vleimor*, rak c'hoazh e rank barzhoniezh *Vleimor* gwiskañ dilhadoù uhelbriz ha bravigoù lufrus. Houmañ a c'hell bale en noazh. Ar gened enni a sav eus an diabarzh. Stag-mat eo outi evel ar c'hroc'hen ouzh ar c'hig. Eeundet ha leundet un arz en deus kavet e lezenn. N'o deus ket hon daou varzh kentañ nevezet hor barzhoniezh hep neveziñ he stumm ivez, tamm pe damm.

(...)

N'eus nemet *Bleimor*, a gredan, en dije graet e brezhoneg barzhonegoù e yezh-plaen. Malmanche, diouzh e du, gant e werzennoù hir-ha-berr, hag implij ar c'hensonerezh ur wech ar mare, en deus klasket terriñ unvanded skuizhus hor gwerzenn. Pegen fraost avat e chom c'hoazh an dachenn ! Ur stumm-barzhoniezh dimp hon-unan hor boa gwechall, stumm ar c'hlotennoù-diabarzh, hag a roe d'hor gwerzennoù ur c'hwekter dianav e gwerzennoù ar pobloù all. Sed ur skouer a dlefe bezañ heuliet gant hor barzhed bremañ. Dilezet eo bet, war zigarez e oa re ziaes, un torr-penn evit ar barzh ! Ha n'en dije ket gallet bezañ eeunet ? Ha ne oa tu ebet da dremen hep ar glotenn-dibenn ha niver ar silabennoù, da virout ar glotenn-diabarzh, a oa dimp, ha dimp hepken ? Ur yezh hon eus a zo kreñvoc'h enni an taol-mouezh eget en darn vuiañ eus ar yezhoù. Yezhoù zo, - ar soazneg hep mont pelloc'h, - a ra gant an taol-mouezh en o gwerzennoù. Biskoazh n'em eus kavet barzhed en hon touez o dije klasket ober o mad eus an taol-mouezh e brezhoneg. »

Ur skrid pinvidik gant hon Roparz. Ur skrid da lakaat prederiañ war hon barzhoniezh. Hon barzhoniezh... Embannet en 1924, pan oa *Gwalarn* en go. Ur mare leun a spi, leun a anken ivez. Lañsañ da vat mennozh ul lennegezh vodern ha staliañ he c'haoter war tan hag entan. Lieskementiñ al labour graet gant an daou diaraogour, hon *Bleimor* hag hon Tangi ha kemer skouer digante. « Ne c'houlennan evit Breizh netra muioc'h eget ar pezh a welan e pep bro all : ur varzhoniezh tud, ha n'eo ket ur varzhoniezh vugale. » eme hon Roparz c'hoazh, hag adarre. Stumm ha danvez ar varzhoniezh zo liammet. Petra dibab eta : barzhoniezh en komz-plaen ? Derc'hel gant sistem hengounel an enklotennoù ? Sevel barzhonegoù en un doare klasel-tre ? Herie an dez hon eus a-bep seurt : ar stumm zo gwevnaet gant ar varzhed, diouzh o ezhommoù skrivañ, diouzh o ezhommoù aet da c'hoant sevel karmoù kizellet dik evit ezteurel o mennozhioù, o fromoù. Hon Roparz en deus ivez briataet meur a zoare da sevel e di a drivliadennoù. Teir gwerzenn gentañ *Ar rozenn du* (1939) war batrom an enklotennoù :

« En ur saonenn e kresk va rozenn du,
 Dindan un oabl teñval ha leizh dalbec'h,
 Gant tiez hakr stlabezet traoñ ha krec'h »

Klaskit an eil silabenn diwezhañ bep tro da gavout ar glotenn diabarzh adkavet en troc'h ar werzenn.
Un doare da reiñ harp d'an taol-mouezh, nemet e vefe ar c'hontrol.... Reiñ lusk ha ton d'ar varzhoniezh.

Evit ar blijadur ur skouer all tennet diouzh *Ar melezhour* (1967), ur barzhoneg zo e andon en don-donañ hon Roparz. Ur barzhoneg savet gant kizidigezh ha blizidigezh :

« Ha mirout a rez, melezhour,
Kuzhet e donder da werenn,
Eus an dremmig kizidik flour
A sellas ennout, ur roudenn ? »

Hon Tangi ne oa ket perzhiek en *Gwalarn*, daoust dezhañ bezañ roet lod eus e skridoù da vezañ embannet gant ha war ar gelaouenn. Evel bet lavaret kant gwezh, un diaraoger, ur rakkemenn. E oberenn meulet ha dezverket gant meur a hini : hon Roparz, hon Maodez hag ivez Reun ar C'halan, pe Mikaela Kerdraon pe c'hoazh Morgan ar Menn.

An tu kemeret gant hon Roparz zo da vezañ dalc'het, *Gurvan* un oberenn a varzhoniezh. Bezañ bamet gant gwerzennoù kizellet hon Tangi. Re wir barn hon Roparz : ur yezh eeun, simpl a vefe tu da lâret zoken, met ur yezh o charreat ganti mennozhioù don.

Dimp da lenn ha da adlenn pezh hon Tangi evel pa vije un hollad *tapas* da zigeriñ hag hon c'halon hag hon spered. Da leuskel hon trivliadennoù da darzhañ, da zispakañ...

An telenner kozh Glanhael an Dall, kenderv da Wenc'hlan :

« Me glev ar mor o trouzal,
me glev ar vran o krozal.
Brini mor, brini gwenn,
ganeoc'h pe geloù laouen ?
Brini fall, brini du,
pe varo 'ziouganit-hu ? »

Kensonerezh. Unan a c'hall bezañ kaset pelloc'h c'hoazh evel ur marsoñjig eus hon c'hloterezh kozh :

« Ar vran a goap hag a ra goap,
koa, koa, koa... goap, goap, goap, goap...
Gouel, avel, ha youc'h, ha yud... »

Na penaos eo rentet trubuilh Gurvan pan anavez mouezh Aziliz ha pan glask reizhañ e vemor :

« Aziliz, Aziliz,
ano heñvel a glevis...
Aziliz, Aziliz,
ene heñvel a welis...

O pe luc'hedenn
em fenn o strakal !
Na pe sklêrijenn
'kreiz an noz teñval !
Doue trugarezus !
Tostik din emañ ar gouloù,
ha me a chom en amc'houlou !
O ar ouel, ar ouel euzhus ! »

Pe c'hoazh an eskemm etre an Ael Gwenn hag an Ael Du, er Beurbadelezh. An Ael Gwenn o komz da gentañ, hag o reiñ dimp un daolenn en stumm negativ barzhoneg hon Roparz, *Ar rozenn du* :

« - Me oar un enezenn yen,
tuniennoù du en he c'herc'henn.
Gwenn eo pep tra warnezhi,
gwenn eo pep toenn ha pep ti.
Eno n'eus heol o sevel ;
pep devezh a red, heñvel :
deiz hep gouloù, noz hep euzh ;
deiz hep esper, noz hep keuz.
Kalz a dud a chom eno,
koulskoude ne weler seurt ;
nikun n'oar eus e genseurt
an doare hag an ano.
Eno ne c'houzañver ket...

- Ya da, pa ne vever ket !

- Eno n'enkrezer ket ken...

- Sur, pa ne vezer ket ken ! »

Hag e kendalc'h an Ael Du troet war-du Gurvan :

« Ma klaskez an ankounac'h,
kae du-hont, bez dinec'h !
Eno, va c'hamalad,
evit ar wech diwezhañ,
te 'glevo ano da dad
hag ar gerig BEZAÑ ! »

Pelloc'h ec'h adkrog an Ael Gwenn troet war-du Gurvan :

« Ar C'hwezh-tro, hervez e froudenn,
'ro liv ha doare d'ar skeudenn.
Ar gouloù a welez en aer
n'eo 'met gaou gant da lagad klañv :
pezh a vez pounner a zo skañv,
pezh a vez skañv a zo pounner.
Pezh a vez eeun a zo kromm,
pezh a vez kromm a zo eeun.
Hag an dra c'houllo a zo leun.
An aour melen n'eo nemet plom,
hag ar plom a zo dour feunteun.
Liv ha doareoù ? Faltazi ! »

N'eus aze nemet tammoù, *tapas* mard on aotreet da ober gant ar ger-se, evit hon flijadur. Lenn hag adlenn *Gurvan*.

Ur yezh eeun, simpl, met o kas mennozhioù uhel.

Evel am eus skrivet c'hoazh, ar Malmanche ne oa ket perzhiek en *Gwalarn*. C'hoariet en devoa e roll, klasket sevel un doare *Gwalarn* a-raok *Gwalarn* ? Moarvat. Ar mennozh a oa en anv e gelaouenn, *Spered ar Vro*. An anvioù a oa disheñvel. An anv *Gwalarn* a zegase mennozh ul lusk, ul lusk tonket da vont da luskad. Hon Tangi a ouie eus ar gwalarn o sevel, evel m'en diskouez an didaskalienn-mañ :
« Ar gwalarn a sav, dister da gentañ, kreñvoc'h-kreñv betek ar fin. ». Un didaskalienn anavezet gant hon Roparz, sur !

Herve Bihan

Levrlennadur

Roparz Hemon, Barzhoniezh, Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh, Al Liamm, 1972, pp. 80-89
(embannet en 1924)

Roparz Hemon, Barzhonegoù, Al Liamm, 1991.

Tangi Malmanche, Gurvan ar marc'heg estrañjour – Mister, Al Liamm, 1975.